

AR SPILLEN.

Ma mije eul lomic guin guen
Betec anter va gueren,
Var vec eur spilen a rajen
Eur sonic queit hac eur voalen :
Chetu va lomic guin efet,
Ha va zon zo commancet.

C'houi oll, marc'hadourien spilou,
A renj ané a gouchadou,
Var ar meaz ha bars ar c'heriou,
En tier ha var ar ruioù,
Clevit, m'ar plich, ar *ganaouen*
A rân var vec eur spilen.

En pep bro hac en pep amzer
Ar spilou zo necesser
D'ar Rouanez, d'ar Varquiset,
D'ar beorien queaz artisanet,
En noz, quercouls evel en deiz,
Er gozni, er yaouanquis.

Baleet dre an oll broïou
En pep leac'h a zo spilou :
Spilou aour, ha spilou arc'hant,
Spilou var alc'huez, livet coant ;
Ha spilou bras, ha spilou erenn,
Spilou du, spilou meien.

P'an da Jannedic d'an danzou,
A ranco cavet spilou :
En he c'hoëf a laca peder,
Ha taër ebars he mouchoùer :
En he freneden e laca
Spilou, spilou, hep conta.

Alies oll labour an den
A depand deus eur spilen :
Ebars ho dorn, pa ve eun drein,
A carfac'h hen lemel souden.
Gant petra vo lamet an drein
Nemet gant bec eur spilen.

Eur vech eur buguel m'o guelel
O clasc carza bigornet.
Paotric queaz ! quemer eur spilen,
Emezon, a gra evellen.
Mad sûr ! eme ar paotr laouen,
Benos da vec va spilen.

Na glasquit quet tabourinou
Da sevel paotredigou,
Na quen nebeut ar scolaërien
Chetu ama ar guir voyen :
Plantit sioulic en ho foesquen
Beguic, beguic eur spilen.

Eun den o vont da besqueta
Hennes a ve faë ganta
Clasc eur fusil pe eur sabren
Petra eta a glasc va den ?
— Eur preonvic pe eur gueillenen
Divar beguic eur spilen

Fumer, pa vo da corn stoufet,
Te a n'em gavo nêc'het :
Mar na ro avel da biben,
Te chaë'hjo varnezi en vén.
Petra h'es lamo' a anquen
Nemet beguic eur spilen.

Mar n'em gav attaquet eun den
A quemer eur pistolen :
Mez stoufet eo toul an noalet ;
H'en distoufa eta zo rét ;
Biquen ermeas n'en da an tenn
Nemet gant bec eur spilen.

Eur vech ma no gant eur spilen
Distoufet toul ar c'hreunen ;
An den a avans hac a denn,
Al laëron spontet a n'em dennu :
Ar vuez, couls hac ar voyen,
A zo da vec eur spilen.

Evelse na veler archer,
Fusillier na canonnier
N'o devezs tout gant eur chaden
Ous ho habijou eur spilen ;
Hac eun arme a gant mil den
A c'houlen cant mil spilen.

Em c'hontre zo eun demezel
A ligne nobl hac huel ;
C'hoant a devezs da lavaret
A ve car tost d'ar Bourbonnet,
Ha gouscoude a renc'goulen
Sicour ous bec eur spilen.

Al labourer, ar pinvidic,
An artisan reuzeudic,
Ar General er c'hombajou,
Ar Roue en peñ he stadou,
En pep leac'h emedy pep den
O clasc beguic eur spilen.

Eun artisan a ra eur c'har,
Eur c'hillorou, eun arar.
Quent evit ober eur spilen
Eo necesser cavet tri den.
Nombr bras a dud a debr bara
Ha ne ouzont quet a dra-ma.

Unan a dail hed ar spilen
He laca éon hac he hempen
Gant eul léton en dro d'he fen;
Eun all a rá he c'hurunen;
Eun all gant eur mén igolen
A lemm beguic ar spilen.

Veise va amzer a dremen
O rima var eur spilen.
Benos, benos evit biquen,
Benos var beguic va spilen!
Benos, benos vit birviquen,
Benos, beguic va spilen.

CHANSON NEVEZ,

Composet var sujet daou Den Yaouanc.

Mar plich guenec'h selaouet hac e clefot cana
Eur son a zo composet a neve vit ar bla,
Zo gret da eur plac'h yaouanc deus a paros Ploubezr,
A chom ebars er c'hastel, var vordic ar rivier.

Hy eo ar c'haëra objet ameus bet remerquet
Bars en bordic Lannion etoues an oll merc'het :
He fortun hac he fresañ, pa vent consideret,
Gant ar sperejou humen hy a ve admiret.

Me deu d'he c'homparagi ous al lore muselet ;
Vit rustoni an amzer hy a chom gaë bepret :
Ma mestres a zo joaus ebars en peb amzer,
Quen a dosta an termen deus a bardon Ploubezr.

Da dialben an avel zo deut eun orajen
Hac a captif ma mestres, ebars en pep tachen,
Dre ma teu ré da gredi a galon, a speret,
Ar pes n'em boa bet biskoas ma unant desiret.

Me zo evel eur *Phoenix* o nijal dre an dour,
Accuset gant ma mestres, hep gallout n'em sicour,
Pe evel ar fleurdilís zo eur fleur estimet,
Mez, dre ardeur an amzer a n'em gav prest guenvet.

Credet, eme ma mestres, eun amzer a m'oa bet,
Ebars ho compagnunez me oa contant meurbet,
Quen a deus da gredi a p'oa ar yolonte
Da guemer possession demeus ma amitie.

Ha pa mije studiet var an *theologi*
Ha tremenet ma c'hlassio ha ma philosophi,

A vijen c'hoas incapabl da ellont explika
Oll talanchou ma mestres, p'an ho c'honsidera.

C'honi émezy, den yaouanc am laka cals souezet ;
Antren em c'hompagnunez hep beza bet pedet !
Ho mado hac ho talant a zo dister meurbet :
Me ho les en liberte, pa n'en d'oc'h d'am souhet.

Me a requet d'am mestres graçou en abundans,
Ha din eun talant gairion evit poursuiv ma chans !
Me zo vel eur c'hriminel ous ar chaden staguet,
Hep cavet nep esperañ da veza delivret.

Me renç stigma ma roëjou er bord all d'ar rivier,
Ha sortial gant glac'har ermes deus a Ploubezr :
O c'hantren en Tonquedee me a vo consolet
Gant ma mestrezic *Fanchon* : alies e zon bet.

Brema me za da vouet da gavet bord ar mor
Vit passeal ma chagrin gant muoc'h a henor
Lec'h ma clevin ar *Syrén* er mor don a cana :
Hannes a deu da charmi calon ar re drista.

Me ho ped, paysantet, pere zo er scolio,
Pa glevfet ar chanson-ma, repret ma c'homzo :
Me zo eur c'hoader yaouanc, n'en d'on quet studiet ;
Evit tremen ma amzer ameus he c'homposet.

Ar canonen zo rimet en bordic eun dourel
Savet var pevar pilier, exposet d'an avel,
Gant eun artisan yaouanc divalo a speret,
Evit rei lod anezi, goude, d'he vignonet.